

# An distro-skol war brezhoweb.com !



Dilun 28 a viz Gwengolo, 8 eur 30 noz



## WebNoz 29 Skolaj Diwan Sant-Ervlan

Daou dem pennañ d'ar WebNoz

### Tabut

- Distro-skol digustum 'barzh Sant-Ervlan : digoret eo bet Skolaj Diwan nevez Sant-Ervlan. Dre beseurt heñchoù 'c'h eo bet ret mont evit dont a-benn da zigoriñ ar skolaj-mañ ? Peseurt skoilhoù, peseurt skoazell a zo bet kavet ? Penaos eo tremenet an traoù en distro-skol ?
- Breizh 5 departamant, pelec'h 'omp erruet ganti ? Cheñchet e vo lezenn ar strollegezhioù departamant : petra 'dalv ez-pleustrek ? Peseurt galloud a chomo gant ar strollegezhioù-se, gant ar Rannvro ? Sell aze deus petra 'vo kaoz gant Lionel Buannic hag an dud pedet gantañ.

Evel kustum e teuy sonerien deus ar vro da soniñ war-eeun en abadenn.

### Muzik

**Gweltaz Adeux** a gonto deomp deus ar bladenn 'mañ o prientiñ.



Kanañ 'ray **Youenn Guillanton**, a capella, daou don tennet deus e bladenn *Goulou war ar mor*.

